

2

Mes ne badas qet pel e remsi
Na renq, siaas, coli e vues.

An den yaouanq en eur voela
Evellen a c'houlen qunta:
Petra eo qement-ma, va c'hamarad?
Ni a so bet en em garet;
Me garje evije te ar c'henta
Eus va asista em heuret.

Hep ma sonjas en drouc ebet,
E continuas e hent bepret;
Pa voa deut an de ma voent eureujet,
Hac an dud eus tol azeet,
En em gavas ive an den croug'et,
Hac o laqas oll estonet.

En pen an dol ê en em laqet,
Cals deus evelet so semplet;
Ma lavaras d'ar gompagnunes:
Noc'h eus ezom d'en em epouvanti;
Me ne vijen qet deut en o toues
Anes ma voat bet eus va fedi.

Hac evelse, va c'hamarat,
Ar vech-ma ne heus qet grêt erfat
Eus a fedi da zont d'ar banqet;
Guel e voa dit bea lavaret:
Doue da bardonje va ene,
Pa veles e voan decedet.

Var ar g'ir e tisparias,

3

Un tan diontan a losqas,
 Qen nā de suillet an abijou,
 Bleo ar voaset, coefou ar merc'het,
 Ep ma heljont dibri nac eva,
 An dud d'ar g'êr so en em dennez.

An den neve epouvantet
 O velet sort tra eruet,
 O vea m'en devoa disclêriet
 E voant bet o daou camaradet,
 En devoa aon da vea qemêret,
 Ha gant ar justic punisset.

Nos e euret en deus sonjet
 Antronos quitat e bried;
 Ar som eus a bemp blas varnug'ent
 En deus-i lêzet intanves,
 Hep cousqet ganti nemet un nos,
 Dre chans en em gao doug'eres.

Da c'houlou de e partias,
 Elêc'h ma carje Doue e gas;
 Eur pel bras eo êt eus ar c'hartier
 Qent ma c'houlen condision:
 Erfin en em gavas manific
 Gant un otrou hac un itron,

Laqet e vee da bourveer,
 Ha memes da zen a affer;
 Ar som eus a bemp blas varnug'ent
 E ra e servich excelant,

4

Heb ober na pris na comandamant,
An oll anezan voa contant.

Pedet e voe gant an otrou
Da ober pris gantan ha gajou;
En a respont gant humilite,
En ur dont d'en trugarecat:
Eus va bea miret en ho ti,
Otrou, ne meus affer netra.

E bried e devoa ur mab
Hac a voa ganti disqet mat;
Casset e voe ganti d'ar studi
Memes evit bea bêleg;
An de varlerc'h ma c'hoferenne
E dad er g'êr so en em gavet.

E dad hac e vam a varvas,
E bried a chomas er plas
Da laqat condui an tieg'ez,
Deus e mab e devoa sourci,
Qemer a ra evit al labour
Mével ha plac'h d'e servichi.

An den-ma en devoe un ure
Dre e gousq un nos en e vele
Eus e dad, e vam hac e bried;
Ma laras pa voa difunet:
Allas! sioas, me gret int maro!
Ret vo mont d'ar g'êr da velet.

Antronos vintin pa savas,

5

Digant e vestr e houlernas
 E gonje, mar boa e vadeles,
 Ha qercouls digant e vestres;
 Ma laqas tud an ti en glac'har
 Dean hac en tristidig'es.

Va mignon bras, qent or c'huita
 Poas demp bara c'hoas ur forniat;
 Gra ur guing evel ma out custum,
 Digas anezi din da blada,
 Hac onnes a lesin em armel
 Qen a gommanço da loeda.

Bep bla e nombre an otrou
 Peg'ement a gleye dean a c'hajou;
 Evel ma voa un den afêson,
 Na vije qet gant Doue blamêt,
 E laqas dean en aour melen
 E gont er guign-se et-ha-het.

An otrou en deveus ordrenez
 Laqat dean en ur serviet
 Qig ha bara d'en eur soulajt;
 O velet ne g'emerje netra,
 E laqas daou scoët ene c'hodle
 Pa voaint eus en em vriata.

Va mignon, qent dispartia
 Tri zra dit a recommandan,
 Na tri zra dit a recommandan,
 Rac-se ne vanq qet d'o ober,

6

Servichout a rayont dit, va mignon
Guelet a ri gant an amzer.

Er c'henta plas ma heani,
Neus fors pe zrouc pe vat a zeui,
Laqa sin ar groas e qerc'hen,
En ano Doue en em armi.
Hac ofr da Crouer da beden
Assur e tui da driomfi.

Va zrompill chasse a roan dit;
Mar digoes dit clêvet tabit,
Sco un tri pe bêvar dol trompill
Da bellat diousit an danjer:
Va c'houign a roan dit da bresint,
Ne vanq qet d'e c'has tout d'ar g'êr.

Er c'henta plas ma c'heanas,
Goude qemeret e repas,
E savas evit mont adare,
Ep sellet tam tout var e dro,
E gouign a anqonac'has eno,
Ma voa êt ouspen un anter-leo.

Ha var e e'his e retornas,
Ha dre ur chans en e c'havas;
Mes ar pez en estonas mui,
Ne vanqe qet un tam enni:
Var e zaoulin en em dolas,
E galon da Zoue a ofras,

7

Un devez all, pa voa o vonet,
 E tal ur c'hoad e clévas cri,
 Hac ensqei tri pe bêvar dol trompill,
 En istant e teu da cessi,
 Da Zoue e c'hoir e galon
 Gant respet ha soumission.

Souden daou zen a rancontras
 Leun a voat, há desolet bras;
 Ma c'houlennas oute o anvî,
 Ma contjont dezan o anqen:
 Ni, emeze so pillet ha laeret
 Er c'hoat-ma gant ar volerien.

Gant true o clévet o anqen,
 E roas deze an alusen,
 En eur lavaret ontan e-unan:
 Daou dra so dija eruet,
 Pe heur ma heruo an drede,
 Doue d'am preservo bepret.

En e baros pa eruas,
 En hostaleri e tisqennas,
 Ma c'houlen eus an ostises da leina
 Ha memes eus tol ar g'eg'in,
 Evit interoji an hostises
 Ar gommançamant bete ar fin.

An hostises en deus interojet,
 Evel so dija raportet,

8

E voa partiet, un den neve
 Deus ar g'er antronos e euret,
 Ar pez a roas cals soupson
 Var e stad hac e gondision.

Ma carje er g'êr bea chomet
 Ne voa qet bet tam tout clasqet
 Gout hac en un de benac en em gav
 Mes martere, va Doue! eo maro;
 E bried a so yac'h manic,
 O parlant gant e mab bêleg.

Ha p'en devoa e lein debret
 Gant joa d'ar g'êr eo retornet;
 Mes, allas! er g'êr pa eruas,
 E bried n'en anavee qet,
 Hac o vea ma voa divezat,
 E c'houlennas bea lojet.

E bried a respont neuse:
 N'en deo qet bras ar gomodite;
 Mes evel a so, mar souetet
 Chom. orrou, e vezoc'h lojet,
 Me garje e vije brassoc'h va fouvo
 E vit guell o tig'emeret.

Pedi a eure a galon vat
 E bried da c'houren e baqat;
 E bried en qemer digantan
 E vit e laqat en e fres;
 Sevel a ra da g'ichen an tam.

9
 Carg'et a laouenidig'es.

Pa eruas en ti ar bêleg,
 c'hes trist, e voa estonet;
 An drouc-speret a deu de denti,
 Digas sonch fall eus e bried,
 voa evit ober fallagries
 teue ar beleg d'e darempret.

Coania a rejont assambles
 en eur memes compagnunes,
 p ma hanvas e vam ar bêleg;
 Mac hi ive geneubeut e mab;
 ma en devoa sonch an nos se
 'el laza, an den miserabl!

Sortial a res en ber amzer,
 tost eno e voa ur hoël,
 Ma ma lavaras d'ar marechal:
 Gra din ur gontel, emezan,
 Ha varc'hoas p'am bo grêt monei
 le réi ur voyen da pêan.

Neuse e voe casset da gousquet
 en eur memes cambr gant ar bêleg;
 no memes e voa daou vele,
 a ma voe laqet en unan,
 ar bêleg a gousq en eg'ile,
 les en ne ra qet re vuan.

Pa sant e voa cousquet ar bêleg,

10

Eus e vele eo bet savet,
 Creg'i a eure en e gontel,
 En avis ganti e laza,
 Lemel an dillat divar e beutrin
 Evit guelet guel anezan.

Inspiret gant Doue, e sonjas
 Ober da g'enta sin ar groas;
 Ar bêleg a res teir griaden
 Dre e gousq ha var boes e ben:
 Emedi va zad eus va lasa;
 Va mamic paour, deut d'am zifen.

An den-ma p'en deveus clêvet,
 Gant glac'har d'e vele eo bet êt,
 En eur lavaret ontan e-unan:
 Va Doue! ne meus get grêt erfat;
 Er c'hêvet a ren a ben teir guech
 Ar bêleg o c'hervel e dad.

E vam, ar mevel hac ar plac'h
 Gant glac'har dan ec'h a deuas
 Gant ar goulou, hac en eur voëla,
 Hag er gambr pa int antreet,
 Pa veljont e voa cousqet ar bêleg
 Int a so bet bras estonet.

E vam da voëla so en em laqet,
 D'e mab ar bêleg e deus lavaret:
 Brema me a vel dre oc'h ure
 Ez eo decedet va fried;

II

Kas-se n'em brosternom amàn,
Da bedi Doue eviutàn.

An den-ma p'en deveus clévet,
Deus e vele eo bet savet,
Hac en em stringas var e zaoulin
Da c'houlèn pardon eus e vab
Hac ive qercouls eus e bried:
Me a so un den miserabl.

Amàn, dre vertu sin groas,
Eus eruet eur miracl bras;
O sonjal e voa den fall ar béleg,
A deue aman d'o tarempret,
Penevede ma on en em groajet
Gant ar gomet en boa-en lazet.

Setu me dirazoc'h prosternet,
Grit ho justis evel ma zeo dleet;
Contant e zon da soufr ar maro,
Just eve din, pa meus meritet;
Mes gouscoude, sur, ya ato
M'oc'h assur emeus o caret.


Pebes joa ha contantamant
A voe er gambr en un istant
P'en un anavejont priejou
Hac ar béleg evit o mab!
Mâ c'hejont o zri d'en em vriata
Gant eur garante admirabl.

12

Neuse pa voaint-i o leïna;
 En o fljadur ha gant joa,
 E c'houlen eus e bried ar paqat,
 Evit caout ar guign da droc'ha,
 Cant lous'adur a goeas anezi,
 Ep ma vouiet e voa enni netra,

Antronos ec'h hoferennas
 Ho mab gant magnifisans vras;
 Gras demp da vea participant
 Ebars en e oll sacrificou,
 Ha d'en em velet er barados,
 O veuli Doue er joayou.

A M E N.



E Montroulez, eus a Imprimeri LEDAN.